

Thérèse Querré: Penn-Pater Meme Mari (Gwenedeg)

Boñ, beñ eh an da gomañs... Eh an da lâret deoc'h istoer ur veme a gostez Baod. Meme Mari veze graet anezhi. Ha hi gave mat he banne kafe bemdez, hag ur banne lagout a-barzh. Ha hi oa ur vaouez santel, hi yae d'an oferenn bemdez, bep mintin hi yae d'an oferenn. Ha bep mintin goude an oferenn, hi yae da lâret ur penn-pater dirak ar Werc'hez Vari. Ha hi lâre ar bater-mañ:

- O Gwerc'hez Vari, grait ma 'm bo bemdez mam banne kafe hag ur banne rikiki a-barzh.

Hag... bout eh oa ur c'holist, unan hag he gwele é monet bemdez mod-se da lâret he fater ha... eñ lâre:

- Mes, eh an d'ober ur fars da Meme Mari.

Ha eñ zo aet un deiz neuze goude... a-dreñv ar Werc'hez, kwa. Ha setu c'hoazh daet Meme Mari atav da lâret he fater:

- O Gwerc'hez Vari, grait ma 'm bo bemdez mam banne kafe hag ur banne rikiki a-barzh.

Hag ar paotr-se deus lâret:

- Kafe po, mes rikiki po ket a-barzh.

O, hi 'selle a bep tu; wele ket hani anezhi.

Hi 'lâre:

- Mes, na piv en deus komzet e mod-se?

A dam, hi deus c'hoazh lâret atav he fater en-dro:

- O Gwerc'hez Vari, grait ma 'm bo bemdez mam banne kafe hag ur banne rikiki a-barzh.

- A! Kafe ho po, mes rikiki po k' a-barzh!

Hi selle a bep tu, hi lâre:

- Mes... bout zo unan bennak en deus komzet neoazh, mes... neoazh 'd eus ket ken 'medin ma-unan amañ... drol alkent.

A-benn ar fin hi deus savet he daoulagad d'ar lein, ha hi deus gwelet ar c'hrouadur Jezuz etre divrec'h e vamm.

- A mes, lâre-hi, eñ eo sur walc'h. Mes serrit-c'hwi ho peg, marmouz, ha laosk' ho mamm da gomz!